

UR GER BENNAK A-RAOK

Abalamour da betra embann testennoù diechu gant Roparz Hemon ? Abalamour m'eo bet stummet-distummet al lennegezh vrezhonek gantañ. Lenn e labour a ranker eta, c'hoazh hag adarre. Lenn... ha klask kompren ha n'eo ket kanañ meuleudi pe letanioù toull dezhañ.

Lenn euriaoù¹ Roparz Hemon 'mit-hu ? E-pad pell n'oa bet Roparz Hemon ken nemet ur marvailh evidon : stourm ar brezhoneg enkorfet, kig ha gwad – liv ha paper yantao ! – pimpatrom ar manac'h-soudard. E-giz maread tud all em boa bet tro da gaozeal diwar e benn, diwar-benn e labour, e skridoù hag e vrezhoneg dreist-holl... hep bezañ lennet an disterañ tra bet skrivet gantañ ! Hillig hon deveze gant un hevelep kaozioù : chaok, glabous ha nebeut a brederi. N'oa ket anv da lenn e skridoù c'hoazh, ur frazenn pe ur pennadig bennak, bet roet deomp da grignat. A-walc'h e oa bet evit ober hor soñj. Evit skrivañ heñvel ouzh ar wirionez : n'eo ket marvailhat a raemp met sachañ a-du gant Roparz Hemon pe sevel a-enep dezhañ.

Abaoe em eus lennet *Gwalarn, Kannadig Gwalarn, Sterenn, Arvor, Ar Bed Keltiek*... Lennet em eus danevelloù Roparz Hemon, e romantoù, e varzhonegoù, e bezhioù-c'hoari... Nouspet pennad bet skrivet gantañ ha nouspet

1 Eurioù : levr (liester : euriaoù).

all bet skrivet diwar e benn. Danvez meur a lennadenn a zo e skridoù Roparz Hemon a gav din ha danvez tabut enno, re wir eo.

Cheñchet-krenn – re grenn ? – ar skrivañ e brezhoneg gant Roparz Hemon ha d’ar wech ez eus bet kred ha diskred warnañ :

« *“Ra vezimp barnet diouz hon oberou,” a lavare R. Hemon o kregi gant e labour. Beza e c’hell kaout fiziañs e barnidigez ar remziadoù da zont. Gwalarn n’eo ket hepken an darvoud pouezusa c’hoarvezet e Breiz en ugent vloaz diweza, digoret he deus eur marevez nevez.* »²

Er purgator – hag en ifern zokenoc’h ! – e oa en em gavet diwezhatoc’h ha klasket e oa bet abeg e skridoù zo : *Ur Breizhad oc’h adkavout Breizh, Premier et dernier manifeste de Gwalarn en langue française, Pirc’hirin ar mor, Un den a netra...* ha kement tra bet graet, skrivet, embannet gantañ e-doug an eil Brezel Bed. Estreget kaol a oa da gaout gant ar remziadoù deut war e lerc’h. Aner trueziñ outañ am eus aon rak gwall griz e oa bet gant ar skrivagnerien all³.

Gaou e vije skrivañ ez eus bet klasket gouzout muioc’h

2 SAV, *War-dro niverenn kant eus Gwalarn*, Sav, Nevez-Amzer 1937, niv. 6, p. 24.

3 Er gouzout a rae ervat : « Ha c’hoazh e welan lizheroù ha pennadoù savet gant tud yaouank, o lavarout eo poent d’ar rummad kozh tevel evit ober plas dezho ! Plas a zo, a gredan, evit an holl. Hogen ni ivez – me dreist-holl – a zo bet garv gwechall e-keñver ar re a oa deut en hor raok ». Hemon Roparz, *Lizher da Abeozen*, d’ar 6/5/1962, 17/72, dielloù Roparz Hemon, LV Kembre.

diwar-benn e labour avat. Spontañ un nebeud “tud fidel” a zo bet graet gant un dro-fizik bennak : « Digorit an dielloù ha gwelout a reot a bep sort, re gamm ha re dort... » war un ton anavezet, da ganañ *ad hitlerum*... Reiñ kred da vrudoù drolik : aozet e oa bet ur “brezhoneg nevez”, unan fall eta, gant Roparz Hemon evit doare. Karout a rajemp lenn, klevout brezhoneg ker fall all aliesoc’h hirio an deiz koulskoude.

Hag hiviziken ? Lenn a reer e skridoù atav, al lod anezho yantao : *Mari-Vorgan, Diamantoù Keroulaz, Nenn Jani, Kleier Eured*... C’hoari a reer e bezhioù-c’hoari gwech ha gwech all, hogen *Meurlarjez* am eus bet tro da welet dreist-holl. Ober a reer gant e c’heriadur ingal hag ur ral ez eo ne ve ket unan war un daol en ur c’hlas divyezhek. Diaes gouzout e pe stuzioù e vije ar skrivañ, an embann, ar skoliata e brezhoneg paneve Roparz Hemon. Anat deoc’h n’oa ket heñvel planedenn hor yezh.

Un drailh ez eo en istor hol lennegezh dreist-holl. Abeg a zo da gavout e kement skrid en deus aozet, gwidilus ez int ha lavar-dislavar gantañ meur a wech. Hogen peseurt a zo da lenn enno ? Tro bluenn ar skrivagner, danvez e skridoù evel-just... Ar c’hamm ma ’z int pe ar c’hlañv ma ’z omp ? Lakaet omp diaes gant skridoù Roparz Hemon. Diaes deomp peuriñ fenneier nevez e brezhoneg, ken diaes all dizonañ diouzh hor c’hoant troioù-lavar, anvioù-lec’h, troiennoù ar vro-mañ-bro... Ha nasket ez eo al lennegezh vrezhonek ? Ha gellout a reer « *klask an Hollel...* » hag heugañ « *rak blaz ar “rannvro”* »⁴ ?

4 Hemon Roparz, *Prederennou diwar-benn al lennegezh*, Kornog, C’houevrer 1929, niv. 2/3, p. 41.

Met un drailh ez eo istor hol lennegezh en oberenn Roparz Hemon ivez. Dispennet eo bet meur a wech : ar yezh diouzh un tu hag ar skrivañ diouzh an tu all. Graet meur a rann diouti ha lennet e vez tamm-ha-tamm : preder, dudi, istor... N'eo ket bet lojet preder hag enkrezioù Roparz Hemon en un nebeud skridoù hepken koulskoude : *Mari-Vorgan, Pirc'hirin ar mor, Meurlarjez pe Roperzh Emmet...*

Rostet meur a gudenn e skridoù Roparz Hemon, en holl anezho. Skoachet e gredennoù hag e enkrezioù enno. Lennit *Ar balafennoù gwenn* eta ha klaskit gouzout piv ez eo Silvan, ul liorzh kuzh en e spered. Enni « *bleunioù ar faltazi, plantennoù ar c'hoantoù diwanet un deiz hag aet da douell. Ur skeudenn eo eus ar blanedenn a vije bet hon hini ma ne vije ket bet diskaret hor spi gant ar vuhez.* »⁵

Piv ez eo Liza ? Ar skolaerez aet da lennerez-plane-dennoù. « *Chomet dek vloaz, dek vloaz a zienez hag a reuzeudigezh, dindan urzhioù ur renerez kozh, kintus, o kelenn da verc'hed lorc'hus, dismegañsus ha diot, a gave dezhi. Liza ne oa ket graet evit kelenn.* »⁶

Na Roparz Hemon kennebeud all moarvat. E 1929 en doa « *kollet ar goanag hag ar fiziañs {en doa} bet e galloud ar Gened...* »⁷. Prest e oa eta rak n'eus tra da skrivañ diwar ar goanag hag ar fiziañs. Prest e oa, bec'h warnañ hag e bluenn ha skrigañ gant an dizemperañs.

5 Hemon Roparz, *Ar balafennoù gwenn*.

6 Ibid.

7 Hemon Roparz, *Gwalarn 1930*, Gwalarn, Goañv 1929, niv. 20, p. 4.

*« ... A-zruilh em eus skuilhet
Fealded ha tenerded hed-treuz
Dre rec'hell ar gouelec'h.
N'ez karen ket, hag ez omp aet hon hent... »⁸*

Ouzhpenn ur raktres evit hor yezh ez eo oberenn
Roparz Hemon, lennegezh an hini eo.

Erwan Hupel

8 Hemon Roparz, *barzhoneg*.

ROPARZ HEMON, DREIST AR BED HAG A-DREUZ DREZ HA SPERN

Erwan Hupel

DIWAR NETRA ?

Penn-kentañ an XX^{vet} kantved e oa. N'oa ket a lennegezh vrezhonek. Netra ebet : « *Il y a donc eu une culture bretonne ; cela ne semble pas contestable. Mais, ce qui l'est encore moins, c'est qu'elle a sombré tout entière, et sans laisser de trace.* »

Kaozioù diskiant a lavaro al lod, disakr a lavaro al lod all. N'eo ket gant Roparz Hemon e oa bet skrivet un hevelep frazennoù avat, gant... Anatol ar Braz an hini eo⁹. N'ouezan ket ha lennet e oa bet tezenn Anatol ar Braz gant Roparz Hemon e 1926. N'oa ket gwall zisheñvel e soñj avat :

9 Le Braz Anatole, *Le théâtre celtique*, Paris, Calmann-Lévy, 1905, p. 229.

« *N'hon eus ket a lennegezh vroadel. Paouezet hon eus, pell a zo, da vezañ ur vroad. Eno emañ an dalc'h. Ac'hano si kentañ, si diwezhañ hol lennegezh. Distrempet eo bet, soubet e spered Bro-C'hall, heñveloc'h ouzh lennegezhig ur rannvro bennak a Vro-C'hall eget ouzh tra all er bed.* »¹⁰

Hag enor d'Ar Braz hirio an deiz ha dismegañs war rener *Gwalarn*. Abalamour da betra emit-hu ? *In cauda venenum* : « *Ur wir lennegez hor bezo pa vimp aet d'ur vroad adarre. N'eus ket a lennegezh vras hep spered broadel yac'h* ».

Aet o spered (broadel) digant ar Vretoned eta. Un diwezh evit Anatol ar Braz, un deroù evit Roparz Hemon hag ar pirc'hirin Hemon ha mont war e lerc'h, kalon un Donalda en e greiz : « *Karet em dije beza unan eus ar Vreiziz-se o devoe da addeski o yez e-giz eur yez estren...* »¹¹. Lemm e oa pluenn Roparz Hemon : paour ez eo hol lennegezh, barzhed hon eus bet met nebeut a wir varzhoniezh, diouizieki omp, dalc'het gant gizioù ur c'hantved all, doareoù ur vro all... En ur vro all, en ul lennegezh all, en dije gellet en em gavout botoù storlok hag all, diskar ha skrivañ.

Skrivañ en doa graet evel-just met prederiet (dalc'het ?) e oa gant stad hag amzer da zont ar yezh. « *Ar gened aner* »¹² emezañ. Aner skrivañ e brezhoneg ? Tra ! Penaos skrivañ e brezhoneg pa ranker skrivañ *evit* ar brezhoneg avat ? Aze

10 Hemon Roparz, *Studi hol lennegezh*, Gwalarn, Nevez-amzer 1926, niv. 5, p. 50.

11 Hemon Roparz, *An Aotrou Bimbochet e Breiz*, Gwalarn, Brest, 1927, p. 48.

12 Hemon Roparz, *D'eur plac'h yaouank o kutuilh bleuniou da serr-noz*, Gwalarn, hanv 1930, niv. 22, p. 5.

edo an dalc'h. Abalamour da betra diskar pa ranker sevel diwar netra ? Anat deoc'h n'oa ket chomet boud hogen gwall cheñchet e c'hoant skrivañ ha ker cheñchet all al lenn d'e skridoù.

Treñ a reas ar skrivagner e rener neuze. Diouzh grad ar re yaouank hag o c'hoant dispac'hañ e oa preder Roparz Hemon ha pa oa bet savet *Gwalarn*¹³ e 1925 e oa ur guchennad anezho prest da vont gant an hent toullet gantañ : Jakez Riou, Youenn Drezen, Yann-Eozen Jarl, Abeozen (Fañch Elies) pe Jakez Kerrien. Diwezhatoc'hik e oa deut ur remziad yaouankoc'h ha ken entanet all e oant : Kenan Kongar (Frañsez Kervella), Maodez Glanndour (Loeiz ar Floc'h), Langleiz pe Meavenn (Fant Rozeg)...

Skrivagnerien vrezhonek pennañ ar c'hantved all eta ha tout o deus bet degemer d'o skridoù e kelaouenn Roparz Hemon. Setu Roparz Hemon lakaet da oberour ar brezhoneg ha pa vije bet gwall nebeut a lennerien da *Walarn*¹⁴ :

« *Ur burzhud e gwirionez eo bet buhez GWALARN,*

13 Mennozh Roparz Hemon a oa skrivañ evit *Feiz ha Breiz*, met n'oa ket bet embannet e bennad kentañ ha bet e oa bet o skrivañ evit *Breiz Atao* azalek 1923. Daou vloaz da c'houde e oa bet krouet ur stagadenn da *Vreiz Atao* : *Gwalarn*. Roparz Hemon a oa rener *Gwalarn*, bet graet ur gelaouenn diouti hec'h-unan kerkent hag ar seizhvet niverenn embannet e diskar-amzer 1926, hag ur gelaouenn vizek anezhi azalek 1930. Embannet e oa bet 165 niverenn etre 1925 ha 1944.

14 « Buan e voe kavet un 300 bennak a goumananterien. Ne greskas ket kalz o niver goude se. En diwez, ma ne fazian ket, ne oa ket muioc'h eget 500. » Hemon Roparz, *Gwalarn... ha goude*, Al Liamm, Mae-Mezheven 1975, niv. 170, p. 165.

ur burzhud, miret buhez ennañ gant bolontez didrec'hus un den e-unan-penn. Rak, mar deo chomet feal dezhañ e genlabourerien, war ar rener eo o deus pouezet an holl brederioù stag ouzh buhez ur gelaouenn. »¹⁵

“Burzhudoù” all a oa bet : kelaouennoù all, geriadurioù, kentelioù yezh, levrioù evit ar vugale... Lakaet kement tra graet gantañ da gentel, ha kement kentel d’ur seurt mojenn : labourer en doa Roparz Hemon a-lazh-korf evit ar brezhoneg, hep damant ouzh e boan, ha marvet e oa ouzh ar stern. C’hoarzhin goap o deus graet darn ouzh folkloraj an Hemonisted evel-just : ar mestr¹⁶ a chom ar mestr... ha kuzh e rank chom trivliadoù e spered. Maread traoù en doa graet Roparz Hemon evit ar brezhoneg avat ha kaer am eus klask – ha kaer o deus al lod klemm ! – ne gavan den en dije graet kement abaoe.

Diouzh e labour ez eus bet graet ur micherour eus Roparz Hemon ha klevout a reomp divlaz ar programmoù en e skridoù. Evel pa garjemp gouzout abalamour da betra e oant bet aozet, evel p’hon dije avi ha kerse d’un amzer n’hon eus ket anavezet. Bamet ha spontet ez omp rak ul labour bras-divent, youl ha kred ar stourmer. Ur brud savet diwar-goust e oberenn skrivagner siwazh. Ker fonnus ha ker pouezus ez eo koulskoude.

15 ABEOZEN, *Istor lennegezh vrezhonek an amzer a-vremañ*, Al Liamm, Brest, 1957, p. 113.

16 Kongar Kenan, *Roparz Hemon, Hor mestr*, Al Liamm, Gwengolo-Here 1978, niv. 190, pp. 345-352.

AR FRAMM HAG AR GOUZAÑV

Enkrezet e kustum ar skrivagnerien bezañ ha gwall enkrezet e oa mab Julie Foricheur hag Eugène Némou. Divezviet-naet e oa bet diouzh e vugaleaj, « *amzer va bugaleaj, ma oa ar bed ken drant hag an dud ken dibreder* »¹⁷. Gaou a lavarer eta : ur spont eo koshaat : douget e oa da studi ar yezhoù pa felle d'e dad ober ur politeknisian anezhañ. Ha trouz anat deoc'h, hag eñ ha tec'hout eus ar gêr e-pad un nebeud dervezhioù. Den ne oar da belec'h. Douget e oa d'ar brezhoneg ha den ne rae van. Ha da biv en dije gellet displegañ e oa douget d'ar baotred e palevarzh kentañ ar c'hantved all ?

Trumm e oa aet an traoù war o c'hemend-all. Alese e c'hoant frammañ marteze a-walc'h. Heuget e oa gant « *beleien-veur an arz nevez* », spontet rak « *urzh ar gevredigezh o kouezhañ* » ha c'hoant gantañ plantañ « *un oaziz er gouelec'h !* »¹⁸. Pa oa bet e Chester e Bro-Saoz e oa bet plijet gant ar savadurioù kozh ha skrivañ en e eñvorennoù : « *Kalz eus an tiez-se, a ouzon, a zo nevez, adsavet diouzh patrom tiez kozh diskaret. Ne vern. Brav int* »¹⁹.

Frammañ diwar netra ? Pakañ a reoc'h. Ur peur bennak e rankimp studial e skridoù ha klask kement tra en doa awenet anezhañ. Anat eo levezon *Dubliners* James Joyce pa lenner *Kleier Eured*. Ken anat all hini W. B. Yeats war e varzhoniezh. Peseurt en doa maget *Santez Dahud* avat ?

17 Hemon Roparz, *Eñvorennoù*, Al Liamm, Brest, 1998, p. 143.

18 Ibid., pp. 20-21.

19 Ibid., p. 90.